

YF_0095_Son nevez war an "Affaire Gregory"

Tud yaouank, me ho ped, pa 'm-eus eun tamm amzer,
Da selaou eur son nevez, pa 'm-eus an tu d'ober

War an "Affaire Gregory" an dud en-devo sonj dizouti
Gwall okuped oa ar vro en he bez diganti.

Barz ar rivier ar Vologn, breman zo seiz vloaz 'zo,
Korfig paour eur paotr bihan oa bet kavet maro

Barz ar Vosges, e ker Leppanges, a zo bet reuz dioustu
Jandarmed, journalisted, o redeg ba' bep tu.

Kriz e vije bet ar c'halon pehini ne ouelche ket
O weled eur c'horf bihan gant he daouarn staget.

Evel loen d'al lac'hadeg, gant fiselen ueled,
Oa bet stlapet ba'n dour yen ar c'horf merzeriet.

Barz Leppanges zo bet klevet bep sort a gaoziou fall
Kap' da lakaad an disurz 'tre familh ha 'n dud all

Rag-kar an diaoul teod fall hanved "bran" en galleg,
Derc'he d'ober gassoni ha trouziou fall da redeg.

N'eus ket eun dra zo gwasoc'h, war an tamm douar-man,
Mamm he-deus ganet eur bugel, tamall he-deus lazhet 'nezan,

Goude e oa Bernard Laroche, c'henderv deus an nesan
Hennez a oa bet la'ret ive, en-dije graet an torfed-man.

Med gwaz Christine Villemin, ar vamm ken glac'haret,
A oa troet e benn gantan, gant trouziou ken kaled,

Ken krenv oa ba'n he spered eo egile en-doa lazhet
E fusul en-deus kemeret hag e genderv en-deus lazhet.

Ar paour kez Bernard Laroche, war an taol bet lazhet
Ha gwaz Christine Villemin dioustu bet toulbac'het.

Eur krim terrubl war benn 'n all, p'ra vo muioc'h neuze
Ha muntre ar paotr bihan, ne oarer ket piou eo.

Hag evid-se n'omp ket bet tamm ebet avanset,
'n hin' neus lazhet Gregory a derc'h boped da redeg

boped = bepred

An amzer a dremeno a bareo pep tra
Ha justis, ma 'n-deus c'hwitet, vo ar Barner Diwezan.

E miz Kerdu tremenet e oa echu ar prosez,
Ha lennet e oa ar setans, en deiziou fin ar bloavez

'Benn fin da gont paotr Villemin a zo bet kondaonet
Ha ze zo c'hoariet c'hwec'h bloaz araok fin ar c'hantved.

(Aozet evid ar c'han-ha-diskan gant Serj Nikolaz. Kerdu 1993).